

## KIS-604 – Gl. social, sociologique, socio(-)culturel

[ Notenn savet da geñver ar c'henlabour  
war ar c'hentelioù Istor evit ar c'hlasoù dibenn studi (sl. KIS-592, La-12, pp. 206-209) ]

(RAH da GE – 16 11 98)

Kas a ran deoc'h amañ da heul titl ar gentel hag ar pennad digeriñ a sav kudenn evidon, o kounañ pezh a skrivec'h a-zivout “stuziadur”, setu e choman bremañ etre daou war an doare da reiñ un droidigezh resis da Gl. *culture* ha *civilisation*.

### SOCIETE ET CULTURE EN FRANCE DEPUIS 1945

#### Problématique

De 1944 à 1974 une rapide mutation sociale transforme profondément la France alors que, parallèlement, on observe le développement progressif d'une “culture de masse”. À partir du milieu des années 1970, l'émergence de la crise économique constitue un adieu aux “années faciles”, sans que se termine pour autant la mutation sociale et l'évolution socio-culturelle.

# Dans quels domaines le cadre de vie des Français a-t-il été bouleversé durant les “Trente Glorieuses” ? Quel a été, ensuite, l'effet de la crise ?

# Quelles ont été les conséquences de ce bouleversement ?

#### Plan du chapitre

- I. La France de la Libération au temps des “Trente Glorieuses”
- II. Société de consommation et “civilisation des loisirs”
- III. Une évolution sociologique qui se poursuit.

Setu amañ va zroidigezh :

### KEVREDIGEZH HA SEVENADUR E FRAÑS ADALEK 1945

#### Kudennadur

Etre 1944 ha 1974 e voe treuzfurmet Frañs a-grenn gant un degemmadur kevredad, en ur ser gant un diorren argreskus eus ar “c'hultur a yoc'h”. Diwar kreiz ar bloavezhioù 1970 e talvezas

eskoridigezh an enkadenn armerzhel kement hag ur c'himiad diouzh ar “bloavezhioù didorr” hep ma voe lakaet un termen, evit kelo, d'an degemmadur kevredad ha d'an emdroadur kevredigezhel-sevenadurel.

# E pe dachennoù e oa bet eilpennet stern bevañ ar Frañsizien e-doug an “Tregont bloavezh a Glod” ? Petra oa bet, da c'houde, gwered an enkadenn ?

# Pe heuliadoù a zeuas diwar seurt eilpennadur ?

Steuñv ar pennad

I. Frañs adalek an Dieubidigezh betek an “Tregont bloavezh a Glod”

II. Ar gevredigezh veveziñ ha “stuzegezh ar goaroù”

III. Un emdroadur kevredadurel o terc'hel da vont en-dro.

(GE da RAH – 20 11 98)

Evel a lavaren en hon pellgomzadenn, emañ a-du gant *kultur a yoc'h, stuzegezh ar goaroù, an Tregont bloavezh a Glod* (nemet e ve mat reiñ ivez ar bomm gallek pa'z eo istorek).

Un nebeut poentoù all :

#### SOCIAL, SOCIOLOGIQUE

Skoemp eo heuliañ ar galleg en e zevedoù eus *soci-* evel en e zevedoù eus *cultur-*, ken strouezhek an eil re hag ar re all. Kentañ kammed eo dispartiañ savboent an istorour diouzh hini ar c'hevredadour : divoud an istorour eo an darvoudoù louerele, dibarek — evitañ ez eo ar *gevredigezh* un unvezriad savlec'hiet en egor hag en amzer ; divoud ar c'hevredadour eo al luniadoù goubarel, hollek, digejadus eus nep furm a *gevredadelezh*. E galleg e reer gant *social* diouzh ar savboent istorel ha politikel (gant un distro ster, un dazvellekaat, diwar *socialisme* war *social*, anat e troiennoù forc'hellek evel *faire du social*) ; e reer gant *sociologique* pa gemerer savboent Sirius, sirius enta ! ha skiantel, mennet hollek hag ergorek (pezh a vez alies un tun ideologek, rak kement a gevredadouriezhoù ez eus hag a zamkaniezhoù : ar gevredadouriezh varksour zo disheñvel mat diouzh ar gevredadouriezh frankizour). Da verkañ ivez an nevezc'her Gl. *sociétal*, Br. *bloc'hennel* "a-zivout ar gevredigezh vloc'hel". An eil kammed, war an dachenn, eo klask petra zo dindan pep arver eus an termenoù gallek, *social* pergen :

### MUTATION SOCIALE

An degemmadur etre 1944 ha 1974 ambredet er gentel ne voe ket unan e luniadoù kevredadel nag e frammoù politikel Frañs, met an hini a c'hoarvezas en aozioù bevañ, beveziñ ha kehentiñ, er stuzegezh, er speredegezh, en divezelezh, er gravez, er revelezh, er goaroù, e berr e kement a ya d'ober ar gedvuhez. Dre se e rafen kentoc'h gant *degemmañ kedvuhez, degemmadur kedvuhazel*.

### EVOLUTION SOCIO-CULTURELLE

Aze emeur el lusenn gefredel ma vourr ar gazetennerion ha dalc'hiaded ar c'hultur a yoc'h. Dirak termenoù eus ar seurt e sav un aters heñvel ouzh hini KANT dirak ar gened pa rae anezhi “ur finvezelezh hep finvez” : ur sterelezh hep ster ez int, eleze gerioù dezho pep a ster met anster pe dost an termen savet diwarno, divellekaat bac'h ! Gwell ober gant *dedroadur* (treuzfurmader na ental ket keal un devredañ pe un davedelezh evel ma ra *emdroadur*). Krediñ a ran kompren ez ambreder amañ ar gedvuhez en he gwiskadoù kulturel (eleze o tennañ d'an devoudoù kefredel, arzel, kravezel, goarel...), pezh a glot a-walc'h gant pezh a intentomp dre *stuzegezh*. Treiñ a rafenn dibenn ar frazenn evel henn : *degemmadur ar gedvuhez ha dedroadur ar stuzegezh*. Stambouc'hek, gourleizhat e chom, anat, ha lemel a c'hallfed unan eus an daou dermen hep koll ster.

### SOCIETE ET CULTURE

Titl hollek ar gentel eo, mar komprenan. Difennadus eo arver *kevredigezh* p'en kemerer evel an termen a vrasañ erdal. O vezañ avat ma komzer dreist-holl a *gedvuhez* er gentel war a hañval, e terefe kenkoulz ar ger-mañ diwezhañ. Evit *culture* e'm be diegi oc'h arverañ *sevenadur*<sup>1</sup>. E-barzh *sevenadur* emañ *seveniñ* ha Gl. *culture*, hep lakaat er-maez an oberoù seveniñ, a verk dreist-holl an ober beveziñ hag an oberoù bevezet. An titl a c'hallfe bezañ : *Kevredigezh ha kultur* pe *Kedvuhez ha kultur*.

### EVOLUTION SOCIOLOGIQUE

Aze e kemerer savboent ar c'hevredadour. Ober a rafenn gant *dedreiñ* (*dedro, dedroadur*) *kevredadel*.

---

<sup>1</sup> Ho taveiñ a ran da *Vocabulaire pratique des sciences sociales* gant Alain BIROU, Éditions Ouvrières, 1966, v° CULTURE, CULTURE DE MASSE. Eno e klever kemmesket an daou son katolik ha marksour diouzh ar c'hiz er mare-hont, a glot koulskoude gant an ideologiezh o ren c'hoazh.

## EMERGENCE

Br. *eskorñ*. An termen-mañ zo amprestet digant ar brederourion a arouez drezañ un diwanidigezh andisplegatus dre an arbennelezh. Un oberenn arz, da skouer, zo diles e kement ma'z eo eskoret, eleze digent, andezreadus diwar nep oberenn all (e brezhoneg e komzer ivez eus *hontkenderc'hañ, nit*). E galleg, ez eus bet ur rikladur ster hag un disleberadur : *émergence* zo deuet da genster da *apparaître, survenir, se produire*. Ha ne spirfe ket : *e talvezas an enkadenn armerzhel kement hag ur c'himiad... ?*

Pouezus eo dezrannañ pizh al lavar a glevomp hag a arveromp bemdez. Rak, liz da Roger LE NESTOUR, “ma ne dalvez ar brezhoneg arnevez nemet da eztaoliñ an unpreder, ez eus tu d'en em c'houleñ da betra en deus servijet *Gwalarn*”.

(GE da RAH – 24 11 98)

E gwir, ne oa ket echu hon preder en-dro da gevatalioù brezhonek ar Gl. *social*. War ar gazetenn er beure-mañ ez eus anv, e sigur “*eurogrève*” an houarnhentoù, eus “*le retour du social*”, eus “*l'Europe sociale*”. Gant kemeradur ar ger *social* en termenoù-se emañ kurzhet ar gedvuhez d'ur gennad anezhi a zo an darempredoù labour ha drezo an tennderioù etre implijerion hag implijidi, arc'hadurioù ar re-mañ a-fet goprou hag aozioù labour, ar c'henniñvoù o sevel da heul, an ec'hwelioù, h.a. Notomp kennotadur marksour hevelep kurzhadur eus sterva an termen *social*. Istor ar c'hevredigezhioù, hervez MARX, zo istor ar c'henniñv etre an nerzhoù kenderc'hañ hag ar c'heñverioù kenderc'hañ, eleze etre al labourerion ha luniadur armerzhel ar gevredigezh. Gl. *social*, er c'hemeradur-se, a dalvez enta kement hag "o tennañ d'al labourerion", o kennotañ, gant pe hep rat : "a zo renkad keflusker pep kevredigezh en istor".

N'eo ket hon emell evel yezhourion priziañ petra a chom talvoudek hiziv en deskivadur a ra MARX eus ar gedvuhez nemet, ha pa savfemp a-du pe get gant e zamkaniezh, n'omp ket endalc'het da blakañ war ar brezhoneg ar c'hurzhadur ster c'hoarvezet e galleg, eleze da adanviñ *kevredigezhel* pe *kedvuhez* ar c'heñverioù implijerion-implijidi. Neuze, pe gevatal reiñ da Gl. *social* en degouezh ?

Daou hent zo. Pe hent an amprest : klevout a ran hon proviñsiz a Vreizh Izel oc'h ober gant *sosial* pe, cheuc'hoc'h, *sokial*, o plakañ diwar ar ger gallek ha,

grevusoc'h, o lonkañ dall an ideologiezhoù liesseurt oc'h intrañ an termen. Pe hent an devezout : o vezañ ma tenn an termen d'an darempredoù labour, e c'hallfed soñjal en un deverad diwar Br. *labour* evel ma reas ar saoznegerion ; hogen daoust ha ne ve ket strishaet betek re ar sterva gant termenoù evel *distro al labourel* pe *Europa al labour* ha se dre lezel e-maez ambred an arvez darempredel ha kenniñvel ? Gwell e ve deverañ diwar Br. *c'hwel*, rak ar stirann-mañ a gaver endeo e-barzh termenoù o tennañ dres da genniñvoù al labour : *ec'hwel*, *c'hweluniad*, *c'hwelgevrat*, *c'hwelvarnerezh*, h.a. En diarsell-se e ve an implijad, al labourer, ur *c'hwelour* pe ur *c'hweliad* g. -ed. Komz a rafed eus *Europa c'hwelour(el)* pe *Europa c'hweliadel*, *distro ar c'hwelourel* pe *distro ar c'hweliadel*. Kosteziñ a rafen gant an deveradoù dre -our- pa'z eus gant ar gedrann-mañ ur c'hennotadur oberiat, engwezhiat kreñvoc'h, soñjomp e geriennoù evel *emsav micherour*, *broadelour*, h.a. Merkomp ouzhpenn e ve ar varksourion evit harpañ war an termen *c'hwelour* evel ma harpent war *micherour* en amzer ma veze micherourion dreist-holl eus al labourerion. Hag o chom en hevelep deveradoù e komzfed eus an *euroec'hwel*.